


NIDIAD

Priz : 4.00€



Pennad-stur

An eil

Diaes a-walc'h eo heuliañ un darvoud diagent. Diaes a-walc'h eo bezañ an neb a heul, an neb a vo barnet evel an hini kentañ, gortozet evel an neb a grogas. Kement a roueed dipitus o emzalc'h evit o endro, dizellezek, dileal d'an tad. Roueed zo bet keñveriet hep bezañ gwelet. Roueed 'zo a stourmas muioc'h a-enep un tad bet ur ramz a zreistelezh. Kement a dud zo bet sammet dindan pouez an hêrezh, pouez ar varn. Diaes eo lakaat ur maen war un all. Diaes eo lakaat ur paz e roudoù un all pe mont « war lerc'h » ar breur, an tad, an hendar, ar c'heneil, ar c'henoberour. An diaested : tremen eus an eil d'ar c'heneil, lakat an eil da vezañ "ken", "kement" hag an hini kent evit kenderc'hel war an hent. Penaos e ober ? Klask sellout an eil hep keñveriañ gant an hini kentañ ? Klask bezañ un dra all disheñvel diouzh an hini kentañ ? Klask mont pelloc'h, sevel brasoc'h pe bezañ kreñvoc'h ?

Aristoteles en e skridoù diwar-benn ar varzhoniezh a dermenas ur meizad peurvat arveret evit skrivañ an istorioù er pezhioù-c'hoari, er barzhonegoù. Un hollad peurvat, un istor peurvat a c'hoarvez eus teir lodenn : an deroù, ar c'hreiz hag an dibenn. Ar penn kentañ eo an darvoud na heul darvoud ebet all dre ret ha war e lerc'h e kavimp dre ret un darvoud all. Er c'hontrol, an dibenn a vez komprenet evel an darvoud o heuliañ dre ret un all ha war e lerc'h ne gaver netra. Ar c'hreiz eo ar pezh a heul hag a zo heuliet dre ret gant un araog hag ur goude. An eil eo.

Pa grouer e lakaer un dra da vezañ, ur bout na vanke ket. Ne oa diouer ebet. Pa seller an oberenn krouet ne gaver tra ebet a vanke en he raok diouzh ur savboent amzerel. Alese diaested an neb a heul. Un diaested eo evit an neb a zo sterniet etre an diaested da heuliañ ha da lakaat da heuliañ. Un diaested eo gouzañv an nerzh ha reiñ an nerzh, gouzañv ar vuhez ha reiñ ar vuhez, bezañ krouet ha krouiñ.

Nidiad

Trugarez da :

Gab Cherel
Marie-France Coïc
Mikael Coïc
Guy Etienne
Lucie Galvani
Andreo Ar Merser
Antoine Piers

Evit ar skoazell o deus kaset dimp.

Trugarekadennoù

Trugarez d'an donezonerion

Lomig Bosser
 Jakez Cosquer
 Gwendal Denez
 Patrick Gicquiaud
 Hervé-Yves Gourvès
 Guillemette In
 Yann-Lug Kerommes
 Alain Kervern
 Kêrvreizh, Yann-Ber Tillenon
 Jean-Michel Mahe
 Enora Molac
 Jean hag Odile Raynaudon
 Tarzh An Deiz
 Christian Troadec

M'hon eus disoñjet tud 'zo, ra vimp digarezet.

Trugarez evit an holl o deus hon harpet.

Dafar evit un Errata a 'n Nidiad 1

War ar follennig-mañ e roomp deoc'h da zifaziañ ar faziouñ puilhañ a gaver en hon niverenn gentañ. En abeg d'an diouer a amzer, n'hon eus ket gallet difaziañ pep tra, ivez hon eus divizet da zifaziañ ar faziouñ grevusañ hag a ziaesae ar muiañ al lennadenn.

Ouzhpennañ un ê d'ar gerioù nes da « sklêrijenn » : p.3, ll.19&22 ; p.19, l.11 ; p.29, ll.6, 16, 24 ; p.30, ll.15&20 ; p.32, l.17 ; p.33, l.26 ; p.35, l.17 ; p.37, l.23 ; p.38, l.11 ; p.39, l.18 ; p.63, ll.1&30 ; p.66, l.7.

Ouzhpennañ ar skorell e etre un adanor hag ur c'hevour reol : p.3, ll.7&8 ; p.60, l.5
 Erlec'hiañ **nebeud** ouzh **nebeut** : p.29, ll.16&28 ; p.30, ll.7&9 ; p.33, l.22 ; p.37, l.20
 Erlec'hiañ **war-du** ouzh **war-zu** : p.30, l.1 ; p.33, l.24 ; p.34, ll.13-14 ; p.35, l.2 ; p.37, ll.29&32 ; p.39, l.5).

Ouzhpennañ ur z d'ar skorell e : p.29, l.22 ; p.30, l.25).

Vioù koukoug : p.5, l.7 **barzhoneizh**, l.11 **na c'eller ket lenn**, l.12 **a dreñv** e-lec'h **a-dreñv**, l.23 **war gill** e-lec'h **war-gil**, **ne ch'ell**, l.25 **asant** e-lec'h **asantiñ**, l. 28 **hiniennel** e-lec'h **hiniennel**, l. 29 **kalonekat** e-lec'h **kalonekaat** (div wech), l.30 **un keklev** e-lec'h **un heklev**, l.31 **ne ch'ellomp**.

Faziou kemmadurioù : p.5, l.18 **ar yarzhoniezh**, l.19 **a zeu**, l.25 **ar yarzhoniezh**, l.30 **ur youezh** ; p.9, l.3 **ar bardoù**, l.5 **brank** ; p.19, l.29 **dremmig youtik** ; p.22, l.12 **vuhez vesarganel-se** ; p.23, l.2 **e 'm genoù**, p.25 **veaj yras** ; p.30, l.28 **e zorn** ; p.32, l.9 **ur yousc'hoarzh**.

Gerioù da erlec'hiañ : p.18, l.25 **kosped** e-lec'h **kondaoned** ; p.44, l.18 ha p.45 l.21 **gouarnamant** e-lec'h **amaezhiadurezh**.

Faziou saozneg : p.26, l.3 **just**, l.6 **loose**.

Faziou henc'hresianeg : p.65, l.18 **Skolê**.

Gerioù skrivet fall : p.29, l.6 **huz** e-lec'h **uzh**.

Krennva

I. Barzhonegoù

<i>E liorzha va c'heneil</i>	P.8
<i>l'AOueN</i>	P.10
<i>An Nevez Amzer</i>	P.11

II. Spered plaen

<i>Glac'har</i>	P.14
<i>A unvouezh</i>	P.16
<i>Skrivañ</i>	P.21

III. Studi ha Savboent

<i>Pobl, gouenn ha broad</i>	P.25
------------------------------------	------

IV. Prederouriezh

<i>Machiavelli : ar Priñs hag an istor</i>	P.28
--------------------------------------------------	------

Goloenn ha tresadennoù : Lucie Galvani
Pajennaazañ : Antoine Piers

Barzhonegoù

Da guzhat

« *To reveal art and conceal the artist is art's aim* » a lavaras Oscar Wilde e raskrid *The Portrait of Dorian Gray*. Lakaat war wel an arz ha kuzhat an arzour, eleze amkan an arz, amkan ar grouidigezh, setu pal ar c'hrouer, an Nidiad. Pep Nidiad a ziskouez un dra a-raok emziskouez. Pep Nidiad a dremen dre un hent a-benn pediñ an dud d'e heuliañ. Ha diemgar eo an Nidiad ? N'eo ket. N'eo ket ennañ e soñj, nag en amgen. O soñjal en hent emañ.

E deroù istor ar Gristeniezh, savet e voe ar goullenn : ha gallout a reer skeudenniñ Doue ? Tabutoù, emgannoù a-leizh a voe tro-dro d'ar gudenn-se. Emvod Nikaia 787 eo a tegasas an diskoulm : gallus eo skeudenniñ Doue rak n'eo ket ar skeudenn a ra an ikon, ar sell an hini eo. Ar ger ikon a zeu eus ar verb henc'hresianek eiko, a dalvez « steuziañ a ran dirak ». Livañ pe tresañ pezh a zo gweluz zo aotreet nemet mar steuzier dirak pezh a chom diweluz.

An arzour eo an hini a dres, a zeskriv, a ziskouez un dra, un hent a zreist an arzour, a zreist ar skeudenn dre an arz, dre an hent. Petra eo an hent-se ? Pelec'h e tegouezher en ur heuliañ ar pezh a ziskouez dimp an neb a grou ? Petra a c'hoarvez pa vez kuzhet an arzour gant e oberenn ? Kement a c'houlennoù zo hentoù da ergerzhout. Ho pediñ a reomp da heuliañ mouezh ha lavar ar barzh. Da gavout un dra du-se ? Piv a oar...

Gwendal Piégais

E liorz va c'heneil

E liorz va c'heneil e kaver ur wezenn.
 A-hed e wrizioù ez emastenner
 E-kreiz ur gwele mil deliennet.
 Ouzh hon c'hroc'hen e klevan komz e rusk
 O sourral en hon c'hichen e c'hoarzh
 O hiboudiñ dimp selloù a sarac'h.
 Selloù paret war e zivrec'h koad
 O furchal hag oc'h ober gwizioù en oabl
 Evit profañ dimp baleadennoù sioul
 E hentoù du o troc'hañ ha didroc'hañ
 Luc'h diwezhañ an deiz ha skeudoù kentañ an noz.

E liorz va c'heneil e kaver ur wezenn
 Sanket etre an neñv hag an douar
 O wareziñ hon hunvreoù dibad.
 Ur wech dindan e zeliou e welomp
 Taniou hud hon steredennoù foll
 O lugerniñ hag o kavout awen er stered.
 Redek a reont dindan sell ar peurbad.
 Stered a ro dezho ur spi.
 Ha ne ouzont ket e kouezhint war daoulin o oabl
 Etre o daouarn, an izelvan laeret evidomp
 Etre dent ki ar stered e kavimp o gwad.

E-kreiz al liorz-se e kaver va c'heneil
 Sanket etrezon ha me.
 Ouzh va gwareziñ diouzh spern hon hunvre
 Diouzh mezvadenn ar bleunioù hag ar sapr.
 Eus ar sapr-se ez evemp hag e soubemp ennañ
 Follañ hunvreoù bet betek ennomp
 Dindan sapr an hunvre en hon gwarez
 Diouzh sapr ur wezenn o tiskouez din
 Kement a flouradennoù hag a lintroù.
 Ez on bet gwarezet gant va c'heneil.
 Gantañ eo e vlean tro-dro d'ar wezenn.
 En ur c'horn a liorz e choman
 Gantañ da zerc'hel soñj eus al liorz kent.
 Da zerc'hel soñj eus hon baradoz kollet

Ennomp hunvrec'ion o vale
 Dindan skeud hon gwezenn devet.
 Devet gant tan hon follentezioù
 Ha diskaret gant pres hon divizoù.

E liorz va c'heneil
 Etrezon ha va c'heneil
 E red ur ster a deñv
 Oc'h eienniñ e hunvre hon gwezenn.

Gwendal Piégais
 D'an neb a oar
 Noz an 28 hag 29 a viz Kerzu 2009

IAOueN

Kousket a ran gwelloc'h. debrññ a ran muioc'h. an heol en deus va Lakaet da vont Er-maez da bourmen. kroget eo an haÑv, un aVel dous o flourañ va drEmm. Distanet on.

brav eo an dud. Siouloc'h on bremañ. gwelloc'h an Traoù. heoliek kaeR eo ar straed ha lirazhin an dud o kerzhout. nepell emañ an aod. enanalañ a ran. ezanalañ a ran. brav eo an dud. un ispiserez, FroUezh a werzher. emañ ar maouezed kozh o vouse'hoarzhin dIn er straed. sichant int. pLijet on gant mousc'hoarzh ar re gozH. e-pad pell n'eo ket bet mousc'hoarzh et ouzhin.

br, un tamm fresk eo aet an Avel da vezañ. n'oN ket gwisket tomm a-walc'h. arabat e ve din tapout riv. plijus eo ar straed koulsKoude. iskis eo evElkent ar gemmadeNn drumm-se.

aiou, bountet on bet gant unan bennak. perak, petra 'm eus Graet ? n'on ket bet jentiL, n'on ket bet sichAnt ? ur fazi 'm eus graet, drouk on bet C'Hoazh ? ne vouse'hoarzh ket mui An dud. dre va fazi eo, dRouk on bet ganto ?

kreññ A ran da leñvañ, da grenañ. n'eO ket reizh. perak oN drouk bepred ?

Malo Adeux

An Nevez Amzer

Douder an amzer
Na brav ar garantez
An amourouzion nevez
Mes petra ober evit an dristidigezh?

Gayaneh Guerineau



Spered Plaen

Pennad-stur

En niverenn-mañ e kendalc'homp da ziorren ar rummadoù a c'hoarvez Nidiad anezho, diorreadur a zo gwir evit rummad lennegel hon c'helaouenn en hevelep doare.

Da gentañ penn, anv ar rummad zo bet kemmet. Soñjal a rae dimp e oa azasoc'h an anvad *Spered Plaen* eget an hini kent, *Kevellennoù*. E gwirionez, mard eo ar c'hevellennoù a ya d'ober korf hon rummad evit an ampoent, n'eo ket war an danvez-se hepken e fell dimp e soliañ, hogen war ur preder lennegel dre vras, istorioù berr o vezañ azon kentañ ar preder-se.

Neoazh, ar bommoù preder nemeto a gavot evit an ampoent vo ar pennadoù-stur, izelek a-walc'h, a ginnigan amañ. N'eo nemet ur poent loc'hañ avat, anat deoc'h, ha spi hon eus e kresko an danvez kefridiel a-zevri en niverennoù da zont.

Komzomp bremañ eus an dodenn hon eus dibabet evit an niverenn-mañ : *Mouezhioù*. Istor an dodenn-se n'eo ket peurheñvel ouzh An tec'h en trimiziad kent, ar poent loc'hañ anezhi o vezañ, n'eo ket ur mennoz diwanet a zonderioù ar spered, hogen ur gevellenn gentveziat, bet kinniget dimp gant unan eus hon skrivagnerezed yaouank ha donezonet kaer, Célestine Doedens — ur barzhoneg anezhi ho poa bet tro da lenn en hon niverenn gentañ. Adalek ar gevellenn he deus kinniget dimp, *Glac'har*, hon eus divizet, a-did marteze — hogen petra n'eo ket titek e lennegezh ? —, kinnig un dodenn d'hon skrivagnerion o klotañ, d'hon meno, gant istor Célestine ; hag an dodenn-se eo Mouezhioù.

Perak Mouezhioù ? Peseurt Mouezhioù ? Reoù div vaouez, an hini yaouank hag an hini gozh, istor Célestine ? Mouezhioù ar gomz plaen hag ar varzhoniezh, a emgej en ur sonerezh heson ha tanav ? Pe gentoc'h mouezhioù div dudenn istor Hoel Mahe, ar paotr hag ar plac'h, dizanv int ivez, a gomz hep emglevoud, evit emgavout erziwezh, e-touez konnar boud ur werinelezh poblek a hañval awenet gant George Orwell ? Pe c'hoazh mouezh ar skrivañ hag ar c'homz, div zremm un hevelep lavar ? Pe martezeourni ha safar mouezhioù ur bobl tapet e korventenn ar brezel hag an dispac'hoù diechu...

Diaes eo bet, war a hañval, an dodenn hon eus kinniget, ken diaes ma 'z eo bet rouez ar skrivagnerion o deus respontet d'ar galv. An heklevioù 'zo bet, koulskoude, panave evit a sell ouzh o zalvoudegezh lennegel — a vo da lezel e dalc'h al lennerion —, a gas ur preder : petra a intenter dre ar ger « mouezhioù » ? Peseurt talvoudegezh gant ar ger-se, peseurt pouez en hon spered ?

Marteze, en tu all d'ar c'hinnig en e un, ar c'hoari eo a zo deurus : skrivañ, desteriañ, kinnig, skrivañ. Un afer a droidigezh a c'hallfe bezañ, pe dost. Ha betek pelec'h e c'haller mont er strollata mennozioù, — *er c'hoari distag a 'n devez*, evel ma larje André Breton —, betek pelec'h e c'haller desellout, askrouiñ ar bed c'hoazh hag adarre, reiñ an dremm a fell dimp d'ar gerioù ha d'ar meizadoù ? Amprouiñ an dec'hmeg, setu aze an dael wirion hag an dael-se eo a gavomp broudis ha dedennus. Ar surrealourion eo a ginnige un amprouiñ a 'r faltazi dre ur c'hoari gant pinvidigezhioù kuzhet hon spered. Ha, hep heuliañ rik o hent, ez eo marteze ar c'hoari hon c'haso dre hentoù all, etrezek dremmwelioù diabell, davit palioù kuzhet ha nevez...

Lennadenn vat deoc'h,
Malo Adecux

Glac'har

Dont a ran tre e 'z kamb, ha da welout a ran, azezet war da wele, o ouelañ hag o krenañ a-greiz da gorf tener. Ha me da 'z priata, fromet, ha da ganañ dit kanenn ar vugale rannet o c'halon gant an doan :

*Daeroù gwer
gant ar boan
Daeroù ruz
gant ar c'hoant*

*Perak e leñvez te ?
Trubuilhet da ene ?*

*Daeroù glas
gant an aon
Daeroù du
en anaon*

*C'hoant 'm eus da frealzjiñ
Ma paouezfes a denziñ.*

*Daeroù gwenn
a-zour glan
Daeroù mouk
daeroù splann
Daeroù a garantez.*

Ha kenderc'hel a rez da dec'hout er-maez eus da gorf ; mor da boaniou o redek dre da zaoulagad en ur wazhig sal, o sevel ur stêr ken lufus ha stered da levezet kollet, ha da soñjoù dister o nijal kuit da heul... N'ouzout ket ken perak e ouelez !

Falc'het ar wirionez,
Aezhennet da zavez,
Distrewet da ene.

Ne c'hallan ober tra ebet evidout. War-bouez sellout an takennoùigoù dour skuilhet war da zivjod. Pellaat a ran, en noz, diouzh bed diziraezus da spered gloazet. Da lezel a ran, da unan penn, evel pep hini ac'hanomp, war da blanedenn. Distreiñ a ran da 'm bed hiniennel, ken aesoc'h din, ken sklaeroc'h...

A-daol trumm neuze e savan
ha kimiadiñ a ran diouzhit
Met o klevout da hirvoud truezus
E sellan e deun da zaoulagad beuzet ha ruz
Hag e welan ur bed drastet.
Met petra, petra zo c'hoarvezet ?

E 'z kichen ez azezan, ha paouez a ra an dour a redek. Bremañ e tigozez da veg, ha da vouezh o krenañ a zispleg din gant konnar abeg da zizesper, poaniou ar bed o c'houzañv, ha da stad a dest dic'halloud. Aze edos pa 'z eo c'hoarvezet. Gwelet 'c'h eus pep tra, dre ar prenestr bras. Deuet int tre, gwallet o mamm dirak ar vugale a-raok o lazhañ. Aze oas ! Gwelet 'c'h eus pep tra ! Penaos bevañ bremañ ? Penaos, 'ta ?

- Ma bugelig kaer, petra out aet da welout gant da vreur er skeudennva ?
Ne oa ket ur prenestr, ar skramm e oa !
Ouzh ar skramm e vez istorioù faos, leurennet gant dremmourion c'hopret !
N'eus bet bugel lazhet ebet !

-Met, mamm gozh, n'eo ket gwir ez eus bet ur brezel en Aljeria ?

Célestine Doedens

A unvouezh

A-raok...

Mouezh unan :

D'ar mare-se ne oan ket mennet da dañva plijadurioù mibilius ar garantez...

Ar galloud oa bet tapet gant an dispac'herion, ur gouarnamant nevez ha komunour stalet e-lec'h ar werinezh poblek deuet da vout re gozh hervez an dispac'herion... Amzer ar prezezennoù bras ha dreistmuzul oa marv, rediet oan, me ivez, da na lavarout tra ken dirak an holl. Rediet da devel skarzhet eus ar gevredigezh, bevañ a raen kuzhet e-touez an engroez.

A-raok an enbrezel, kefridiet oan da bleidiñ gant amaezhiadurezh ar gelaouenn bolitikel "Ar wirionez". Dres, ober a raen war dro gwazva ar c'hehenterezh hag ar moederezh. Dimezet d'ur plac'h dous ha koant, gant pemp bugel e bevadur, ul labour gopret mat, setu penaos ez arc'hwele buhez ur brogarour !

Un noz, ar re ruz a zeuas da 'm zapout. Boureviet e voen, nasket gant ur gordenn ha lakaet en ur voest lastez. Al louskenned-se n'o devoa bet mezh ebet da staotañ war va gwreg ha va femp bugel evit gwalc'hañ o luzadoù a varv ha seveniñ o barnerezh dispac'hel.

Evidon, deuet oa lous ar vuhez. Unanik ha dismegañset e kendalc'hen gant va hent, ken trist, unton ha dic'hoanag ma oa... Eus laez va fondalez diavaez, war boulouard ar stourmerion gozh e welen c'hoazh dibunadeg ar Strollad gant he bannieloù melen, louet ha gell. Santout a raen c'hoazh c'hwez an trec'h en deiz ma oa bet dilennet an Imperator bras ha klevout diskan an dieubidigezh c'hoarriet ken mat gant al laz seniñ riez.

Drouklazherion ar Strollad oa barnet hag an urzh a vere an urzh !

Mouezh daou :

Erziwezh, c'hoant 'm boa kejañ gant ur paotr jentil ha kalonek evel ur c'homunour...

Bremañ, an dispac'h echu, tu oa da renkañ an armoù...

Desket 'm boa ar stourm gant ul luskad dispac'hel anvet "Ar c'hazh". Amkan ar vezin oa ren obererezhioù a-enep moederezh ar Strollad. Daoust ma oan ar yaouañ en aozadur, e tesken buan hag e oan kaset da efediñ an taolioù arvarusañ. E se, dizoloet 'm boa ennon an didu diyac'h da lazhañ, d'ober poan ha da zistrujañ...

Funderch oa bet distrujet penn da benn gant ar gwalldaolioù, boulouard ar stourmerion gozh oa bremañ dirapar ha park an efennoù, ur gwir graou moc'h... Ne vern ! Distrujet hor boa pep tra evit adsevel ur vuhez vracoc'h !

Deiz an trec'h, ez emvodas ar re ruz war boulouard ar stourmerion gozh hag e klevjomp tennoù ar mindrailherezed a-us d'ar pennoù. Ur fest moliac'hel !

Kastizet oa bet drouklazherion an dispac'h hag an Abardaez Meur en doa divanket amzer deñval an dibunadegoù armeadel !

Goude...

Mouezh unan :

Evel ma lavare va zad : « arabat koll e amzer gant an trivliadoù ! ». Selaouet 'm eus va zad holl va buhez...

Eñ a lavare ivez : « chomomp feal d'ar Strollad hag un deiz e vimp gopret ». Ur paotr kalonek va zad... Kefridiet oa, a-raok an enbrezel, da zispenn an aozadurioù komunour berzet. Ober a rae war dro ar gwazadur "An trouz".

Chomet on feal d'ar Strollad... Labourer 'm eus evitañ betek e ziskar. Hogen bremañ e vevan kuzhet hag unanik.

Ul labour 'm eus kavet e-kichen Funderch. Bep mintin e tapan an tren dre ma vevan un hanter eurvezh eus ar vilinerezh a zo loet en ur gêriadenn vihan. Aon 'm eus rak bevañ a ran evel un tec'had, enklasket gant ar warded dispac'her.

E-doug va eurvezhioù dieub e pourmenan war boulouard ar stourmerion gozh. Stourmerion gozh deuet da vout komunour hiziv...

Azetet war ur bank e pledan ouzh ur plac'h a dremen dirazon. Ur gomunourez hep mar ebet, ur plac'h voutik evelkent...

Mouezh daou :

An nevez amzer eo...

Hiziv e pourmenan war boulouard ar stourmerion gozh. Fresk ha heoliek eo an amzer. Stuc'henoù an heol o treuziñ brankoù an efennoù a ro un diabell nevez ha sederaus d'an eztachenn emgann-se.

Hiraezhus on...

Daoust m'eo echu ar brezel ha gounezet gant ar bobl, divlaz e chom an trec'h evidon... Evel un istor a chomfe diziwezh, pep hini o kemer perzh en un avantur dreistordinal hag o kenderc'hel gant e vuhez...

War ar riblenn straed ez azezan a-benn analañ an aer fresk, sellout ouzh an dremenieded hag emvataat eus va buhez a soñjou.

Sioul ha bev on... Hogen war api e choman. Merzhet 'm eus un den a-gleiz ouzh va spiañ abaoe un nebeud munutennoù.

Mouezh unan :

Chaos ! Va gwelet he deus. Ur sellad dre laer met efedus ha resis a-walc'h evit kompren e oan o sellout outi. Petra ober ? N'eo ket ur mare da c'hoari gant an traoù-se !

Mar bezan tapet, ne vin ket ur wech adarre skoazellet gant pennadurezhioù ar Strollad... Kaoz !

Koulskoude, ne fiñvan ket hag e sellan muioc'h c'hoazh ouzh an doueez-se. Petra a lavaran ? Paourkaezh tadig, mar gwelfes ar pezh a ya da heul...

Mouezh daou :

E verzhet 'm eus, eñ ivez a dra sur... Nervennek eo met ne seblant ket kaout aon.

Piv eo ? Ma n'eo ket ur c'homunour, un den eus an tu all eo neuze, evel just. Ar c'hoant gouzout muioc'h diwar e benn a 'm c'has da skeiñ war e du.

Gwelet e vo ha tu a vez da flapañ gant enebourion ar bobl... C'hoari gant spont ar re all zo farsus. Emaon o vont d'ober aon dezhañ, un trec'h nevez evit an dispac'h hag evidon !

Bremañ...**Mouezh unan :**

Tostaat a ra. Emwelout a ran dija a-ispilh ouzh ur gordenn, boureviet ganto ha laosket war ar riblenn... marv.

Mouezh daou :

Goustadik ez azezan en e gichen. Krenañ a ra evel un delienn kouezhet e-pad an diskaramzer. Mat...

Emsellout a reomp.

Mouezhioù a-gevret :

-Piv out ? a c'houlennas ar plac'h.

-Ur c'homunour ! a respontas ar paotr hep gortoz.

-N'out ket...

-N'on ket... a lavaras ar paotr en ur stouiñ e benn.

-Ne 'c'h eus ket aon rason ?

-Ne c'hallan ket, skuizh on ha dismegañset gant ar vuhez... Digarezit me, kollet 'm eus va c'hadardded.

D'an ampoent, an den dic'hoanag a gemeras dorn ar plac'h hag a laoskas warni ur pok flour ha peurbadus... Sellout a reas outañ, trelatet ha spontet en ur ser.

E-tailh da semplañ, ar paotr he skoazellas dre he fakañ d'he dargreiz.

-Pe...petra 'rez ?

E dealet he doa...

-Da... da garout a ran... eme ar paotr en un taol a-raok leñvan evel ur babig.

E dealet he doa ha tapet e oant neuze gant ul liamm digemm. Rankout a raent emgarout.



A unvouezh

Tro-dro dezho, ar c'hinkladur a zeue da vezañ liesliv ha disneuziet. Ar gwez a yae da vouk, melen, glas ha mouk en-dro.

En un taol, o doa disoñjet penn da benn abeg o emgav. Deut oant da vezañ denel, gwerc'h, hep kasoni an eil evit egile. O muzelloù delt a zeue da stekiñ hag o zeodoù da bunañ. Noazh dibourc'h, emvriata a rejont e-pad munutennoù hir war ar bank-mañ.

Tu oa d'ar bed da steuziñ, ne gemmfe ket urzh an traoù evito, siellet o doa o zonkad.

Hogen, ar vuhez a gendalc'he. An dremeniaded a gendalc'he da dremen hag un nebeud anezho a grogas da bleidiñ outo. Lod anezho a baouezas gant o hent. Darn anezho c'hoazh a ematersas : ha tu zo d'ur plac'h e giz hounnezh ha d'ur paotr evel hemañ d'emgarout ?

Ur c'helc'h a wall dud tro-dro dezho... Un trompilher a sonas kan ar bobl. Unan all a grogas ur brezegennvreek. An dud a guzulikas etrezo. "Ar varn diwezhañ !" a lavaras ur wrac'h, "an tan hag ar marv !" a huchas ur gouzen.


Ar paotr hag ar palc'h a gendalc'he d'emgarout ha d'emvriata...

Ar fasoù a yeas war gemm ha displeberet gant ar gasoni e huche an dud evel loened touet. Redek ha lammat e pep lec'h a rejont, evel kirvi-raden diroll. Ar gorventenn a ziboellded-se a gendalc'has c'hoazh un nebeud munutennoù betek ma erruas ar pennadurezhioù.

N'o devoa ket paouezet o briatacrezhioù a garantez p'o skarzhas ar veli uc'hañ eus ar bed.

A-gevret e varvfent...

Hoel Mahe



Skrivañ

Gast !

Sevel diwar ar gador, ober tro ar burev, sellout ouzh ar prenestr, lakaat ar bizied war an tal, serriñ an daoulagad, o digeriñ en-dro, c'hwezhañ, arsellout c'hoazh, hejañ ar penn, distreiñ pinous d'ar gador.

Sellout ouzh ar prenestr. Bezañ pedet d'ober ur bourmenadenn war ribl ar stêr gant an amzer vrav. Ne ve ket ur mennoz mat avat. Labour zo.

Pebezh dodenn zroch, na petra ! Ha ne vije ket bet tu da gavout un dra kempleshoc'h ?

Tremen an daouarn war ar penn, eus an daoulagad da grec'h an tal, alese d'an divjod, mont ha dont, un eil gwech, krañañ betek ar blev, diskenn eus penn ar blev d'ar gouzoug — kement-se en ur c'hwezhañ. Plegañ ar penn.

Biken ne vo kavet an alc'houez. Gwelloc'h mont da bourmen.

Nann.

Adsevel ar penn, digeriñ trumm an daoulagad.

Nann. Dav stourm. N'eus ket a zodenn zic'hallus. Deomp da deurel ur sell er geriadur, marteze e tegaso mennozhioù.

... (db. an dud)

Setu.

...dud) Son eztaolet gant ar c'harloc'henn hag a zeu er-maez eus ar genoù.

...ya...

... (db. al loened) Son ec'hodet dre ar genoù pe dre zoareoù all.

... Trouz, son.

...hmm...

...Pezh a soñj an den e unan, pezh a lavar dezhañ e unan.

Skrivañ

Ma !

Soñjal n'eo ket e giz-se ez eer war-raok.

Trouz an nor o tigeriñ. Sevel ar penn. Kammedoù en trepas. Er gegin. Mouskan.

Penaos 'mañ kont ?

Fallik. Diaes eo an dodenn.

Kae da bourmen enta !

Soñjal e hañval an holl a-du evit mont da bourmen.

Hogen ne vo ket tu da sankañ en-dro e-barzh goude. Emanaut.

Al laboused o kanañ er-maez. Sklintinded o c'han.

Distreiñ d'ar gador, goude renkañ ar geriadur war an astell.

Azezañ, kregiñ er c'hreion, helmoiñ war an daol, sellout ouzh ar follenn wenn mantrus.

Klask bezañ aketus, sipañ d'an dodenn, d'an destenn, da bezh a zo d'ober.

Kan al laboused er gwez, e-kichen ar prenestr.

Na zont a-benn.

Sonerezh er gegin.

Digresk mar plij ! Ne zeuan ket a-benn da brederiñ !

Ar sonerezh o tigrskiñ. Merzhout e karer ar sonerezh-se e-pad m'emañ war zigresk. Santout an ivin o kreskiñ. Ar sonerezh o chom bezant daoust dezhañ bezañ digresket. Un trouzig sarac'hek, izel, padal bezant.

Soñjal n'eo ket koulz d'emheskinañ. Divizout chom sioul ha dilavar. Divizout ober gant pezh a zo, pe gant pezh n'eus ket kentoc'h.

Mont da bourmen.

Nann.

Skrivañ

Trouz er-maez.

Bezañ ranell.

Mont da welout petra a dremen dre ar prenestr.

Un trebarzherezh. Emlavarout e rankfe bezañ berzet d'ar re all labourat pa vez diaes an dodenn. Empentiñ o kas ul lizher d'an dinazelezh : « Demat deoc'h, hag ar vadelezh ho pefe da chom hep staliañ labourioù foran pa vezan o labourat ? Trugarez deoc'h, gant va gwellañ gourc'hemenoù. »

Mousc'hoarzhin er roched. Soñjal e ve fentus.

Soñjal ivez ned a ket al labour war-raok.

Distreiñ pinous d'ar gador.

Adilinañ war ar burev. Serrin an daoulagad.

Adklevout ar sonerezh. Adarre. Emlavarout Nann. Gouzout Eo, neoazh.

C'hoant kaout stouvennoù skouarn.

Klevout e kaner gant ar sonerezh, er gegin.

Serrin an daoulagad, ur wech c'hoazh. Ezanalañ, un tenn bras mat.

C'hoant bezañ bouzar.

Sellout nec'het ouzh ar bajenn a zo war ar burev. Gwenn. Mut. Ne lavar netra. Na lavarout netra. Na gaout netra da lavarout d'ar follenn.

Treiñ ar penn a-dreñv d'ar skoaz. Emlavarout ez abuzer an amzer. Santout an anken oc'h emsilañ.

Emsantout skuizh, nec'het, streset. Emlavarout n'eo ket ur boelladenn skolel. C'hwiñ da emgendrec'hiñ, ha bezañ ankeniet evelkent.

Klevout, a greiz holl, ar pellgomzer o seniñ. Emsantout evel ur c'hrist war ur groaz. Keñveriañ an devezh gant ur Golgota hiniennel.

Ya, alo ? A, te, espar ! Petra nevez ganit ?

Emlavarout ne vo diwezh ebet d'an afer. Pe mar bez un diwezh, e vo un drouziwezh.

Skrivañ

Divizout mont er-maez, a-benn ar fin.

Sevel diwar ar gador, sellout a-dreuz ar prenestr, arlakaat ar gwrezverk, kemer ur vantell, ober ur sin,

Tuch'

digeriñ an nor, he serriñ, kerzhout buan, gorrekoc'h, chom a-sav.

Bezañ er-maez. Erziwezh.

Kerzhout un tamm er c'hourliorzh a zo e-kichen an ti. Santout an avel fresk o flourañ an dremm, serriñ an daoulagad, enanalañ, un tenn mat.

Aaa.

Ober tro ar c'hourliorzh. Klevout kan al laboused er gwez, e-pad m'emañ un nebeud anezho o lakaat o divaskell da grenañ gant an nij ; trouz an avel o tremen en delioù, a-dreuz dilhad o sec'hañ en ul liorzh nepell ac'hann, a-dreuz geot ar c'hourliorzh ; safar ar c'hiri, ar c'hiri boutin, buhez virvidik ar merien a spesad mab den, tourni ar bed, tud o komz gant o gwaz, gant o gwreg, gant o bugale, gant o mignonned, gant o hezoug, gant o loened ; o vrabañsal dirak merc'hed, o huchal d'un arval en deus disoñjet e zoug moneiz, o leñvañ peogwir n'en deus ket c'hoant tadig d'o c'hemer war e zivskoaz, o c'hoarzhin a bouez penn gant kileed a 'n amzer gozh... ur cholori spontus, hidrek, divent, beuzet e trouz diheverzh hogen bezant dour ar stêr, du-hont, a gas tousmac'h flourus he red a-dreuz da beurrest an traoù, ar boudoù, an dud, an netra zoken ; ur cholori a leugn an aergelc'h en e bezh, a zeu da endro, da drevva, a zo an trevva, un trevva a strafuilh, a safar, a gonnar, a levenez, a vuhez, a vouezh uhel.

Bezañ en e soñj e unan. Sellout ouzh ur wezenn, ken leun a vuhez trouzus, chom digas dirazi, ober ur c'hruz d'e zivskoaz.

Son eztaolet gant an den.

Trouz, son.

Soñj.

Komz.

Gwir eo, pebezh dodenn zroch ! « Mouezhioù » !, evel pa vije aes komz diwar-benn ar son eztaolet gant mab den !

Malo Adeux

Pobl, gouenn ha broad

Studi ha Savboent

Pobl, gouenn ha broad

An istor-mañ a grog en dro d'un daol, *tabula rasa* evel m'en lavarer e latin, hini an dispac'h gall. En un doare resisoc'h, tu zo da lavarout ez eo stag ar meizadoù-mañ ouzh ur bed a raimp anezhañ *Renad Kozh* (*Ancien Régime* e galleg, e saozneg hag en alamaneg). En Europa a-bezh e c'haller merzhout dibenn ur gevredigezh diazezet war ar c'hladdalc'helezh ha war ul liamm sujed/riez etre ur roue, un dug, h.a. hag un ezel eus ar bobl. Freuzet e voe ar gevredigezh-se ha, da heul an dispac'h, Napoléon a ledas an argraf da Europa en he fezh : petra ober eus ar gevredigezh kozh, eus ar roue kozh ? Raymond Aron en deus anvet ar blegenn-se an « Anomiezh politikel ». Gant diskar ar gevredigezh-se, e c'haller merzhout diskar ur meizad kevredigezhel a 'r ouenn e ster ar bed kozh. Pa vez arveret ar ger gouenn er Renad Kozh, e taveer, da skouer, da *ouenn Roban, gouenn Montmorency*, un dezverk evit diforc'hiñ rummadoù kevredigezhel, gouennoù pobl pe nobl. A-hed an dispac'h gall e voe merzhet testennoù, skridoù a-enep ar bed kozh, ar Renad Kozh a laka war wel an dispac'h gall evel trec'h ur ouenn war unan all, hini ar bobl war hini an noblañs. En e levr *Qu'est ce que le Tiers Etat ?*, Sieyès a zispleg dimp an dispac'h gall evel trec'h gouenn ar C'halianed (ar bobl) war hini ar Franked (ar vrientinelezh), eleze dibenn un emgann a badas dek kantved.

Goude an dispac'h gall e voe an XIXvet kantved o vont war-du araokadennoù kalvezel dibar war dachenn ar skiantoù, ar gefredelezh hag ar greanterezh. Kalz buanoc'h eget er c'hantvedoù tremenet ez eas ar galvezouriezh denel. A-enep an araokadenn ramzel-se ez emsavas luskadoù evel ar Romantelezh. An araokadennoù-se a voe merzhet er Rouantelezh-Unanet, e Bro-C'hall, Alamagn, Aostria, savidigezh an houarnentoù, oberiadegoù, labouradegoù. Ar c'hèriekaat a yelo stank ouzh stank. E broioù 'zo e voe klasket dilezel ar Renad Kozh pe adsezañ rouantelezhioù kozh o kemplegañ gant kemmoù kefredel ma voe dilezet ar Renad Kozh. A greiz holl, ar meizadoù kozh a ouenn hag a bobl a voe kemmet ganto.

Ar c'hemmoù-se a grogas gant an diaester da lakaat ar Renadoù Kozh da badout. Ken e c'haller, e dibenn ar bloavezhioù 1820 (goude Kendalc'h Wien pergen), stadañ ez a fall an traoù gant ar renadoù kozh en Europa. Bevañ a reer en un distabileded politikel pemdezic. Hoali keitat ur renad politikel e Bro-C'hall ned a ket en tu all da bemp bloaz e-doug an XIXvet kantved. Europa gozh a striv da dreuzvevañ a-enep d'an arnevezouriezh hag un Europa nevez a glask katreizhañ an dispac'h dre ziskuliañ ur c'hilstourm. Alese an disrann etre dispac'h ha kilstourm. N'eo ket mui anat an Europa-se. Met evit eben n'eo ket anatoc'h. Neuze, goude diskar Napoléon ha diskar lañs an dispac'h gall (met en ur lezel arvar evit pep galloud gallus) ez eus un ezhomm er saverezh riez, eleze ez eo ret kavout un diaz solut, evedus a-benn sevel riezoù nevez pe adsevel riezoù kozh.

Pobl, gouenn ha broad

Amañ e vezer dirak darsavioù ha dispac'hoù, pezh a voe anvet war-lerc'h *Le printemps des peuples* e 1848 ha riezoù nevez ganet pe riezoù bet oc'h aloubiñ reoù all hag o krouiñ un doare unvaniezh etrevroadel. Tuet-tre ez eo bet kentañ darsavioù europat an XIXvet kantved. Ar strolladoù politikel eus an tu kleiz oa o tiwanañ en Europa. Gant ar strolladoù-se e voe treuzkaset un despizadur resis d'ar gerioù « pobl » ha « broad ». Kevredadel ha kevredigezhel e oa an dezverk. Ar bobl hag ar vroad a veze komprenet evel ar bobl riek en ensavadur politikel. Hag ar mennoz a bobl riek savet gant strolladoù an tu kleiz a glasse treuzkas mennozioù a gevatalded etre izili en ensavadur politikel. Met ne veze kavet nemet krouadurioù a riezoù nevez flamm. Ar renadoù kozh a glasse kreñvaat o beli. Aze e c'haller soñjal en impalaerezh aostrian-hungariat. Ret oa kavout ur reizhveli, un diaz solut evit lakaat ar riezoù-se da vezañ « peurbadel ». Se n'eo ket anat tamm ebet : disrannet eo Europa etre an dud a fell dezho peurseveniñ meizad an dispac'h ha tud o deus c'hoant distreiñ d'an amzer dremenet penn da benn. Petra a zeu war wel eus an disrann-se ?

Adkemeret e voe meizadoù ar bobl hag ar vroad ; se a glaskimp diskouez gant skouer un nebeud broioù : Bro-Saoz, Bro-C'hall, Alamagn. E Bro-Saoz : emouez ouzh un dreistelez, a anver ar *Civilization*, eleze stadad ur framm armerzhel dibar (kentañ damani armerzhel er bed betek 1940), emouez ur framm armerzhel a ren war ar bed. Emouez eur ouzh ensavadurioù politikel peurvat. Bez' ez eus bet un dispac'h e Bro-Saoz, hogen an dispac'h-se zo deuet a-benn da lakaat en he flom ur stabiled politikel, stabiled nad eo ket bet ken anat e Bro-C'hall da skouer. Ha dlead an dud ezel eus ar *Civilization* eo gwareziñ ar framm armerzhel hag an ensavadurioù politikel. Dre ar meizadur politikel hag an emouez-se eo ganet an impalaouriezh.

E-kichen Bro-Saoz e kaver Bro-C'hall. Merzhet e voe ur vroadelouriezh tu kleiz, eleze diaz ar stourm evit ar vroad diazezet war un dezverk kevredadel. Savet eo bet ar gouenn : petra eo ur vroad ? Hervez Ernest Renan, ur bodad tud o vevañ a-gevret, a fell dezho bevañ a-gevret, ur youl, ur c'hoant boutin ha diazezet war mennoz ar vroad evel ur c'horf kevredadel. Ur Stad-Broad oa da gantreizhañ ha dre se pep meizad a voe arveret evit kantreizhañ ar Stad-Broad-se. En ur gemez a enebiezh e veve, eleze e vo diazezet damkanoù Renan ha re damkanourion all war un enebiezh ouzh an Alamaned. Ur gemez kevratel, eleze ur vroadelezh, ur gevredigezh dezverket hepken dre berzhioù kevredadel, eleze termenadur ar bobl e kentañ lodenn an XIXvet kantved. Ar bobl eo a ra unaniezh ar vro hag ar vroad. Ar c'horf kevredadel-se a fell dezhañ kenvevañ a-gevret dre virout hêrezh an hendadoù. E-tal ar vroadelezh-se eus an tu kleiz, diazezet war un elfenn gevredadel, e tiwanas ur vroadelezh eus an tu dehou, ha se adalek 1848 hag ar bloavezhioù 50. Gallout a reer merzhout e voe embannet oberenn Darwin, *On the Origin of Species by Means of Natural Selection, or the Preservation of Favoured Races in the Struggle for Life* e 1859. E-pad ar bloavezhioù-se e voe embannet an *Essai sur l'inégalité des races* (1853) gant Gobineau. Ar gwad hag ar ouenn a zesachas deur. E-kreiz an XIXvet kantved ez eus un troc'h : emañ ar vroadelezh o treiñ war an tu dehou evel en Alamagn gant ar strolladoù *völkisch*.

Pobl, gouenn ha broad

Ar ger *Volk* en alamaneg a endalc'h ster an tri ger hon eus meneget en deroù : talvezout a ra en ur ser ar bobl, ar ouenn hag ar vroad. Dedennus eo ar *Volk* alaman en doare ma voe un alc'houez evit klask diskoulmañ kudenn vras an XIXvet kantved, eleze an disrann etre an tremened hag an dazont, ha resisoc'h etre ar bed kozh hag ar bed nevez o tinodiñ. Ar *Volk* alaman evel m'emañ hunvreet gant al luskad *völkisch* zo etre an tremened hag an dazont. Enebiezh ouzh an tremened a dremen dre un derec'helouriezh dispac'hel ha dre un enebiezh ouzh an Iliz, a zo elfenn eus an tremened, eus ar bed kozh, hag a zo skarzhet en un doare dispac'hel. Kealiadurezh ar *Volk* a eneb ivez ouzh an arnevezouriezh en e zoare da vezañ diskaridik. Enebiezh ouzh an diskaridigezh hag un enklask a undeo eo perzhioù pennañ luskadoù evel hennezh. An kez enebiezh a gaver en oberenn Thomas Mann da skouer, en e romant *Buddenbrook*, levr ma vez savet ha displeget dimp ur stadad a zo stadad un diskar eus ar sevenadur en Europa, sevenadur ar C'hornog. Displeget eo kement-se en oberennoù Freud, Mann, Nietzsche, h.a. Bez' ez eus ur stadad a 'n diskar erruet en abeg d'an arnevezouriezh. Hervez un nebeud skrivagnerion levezonet gant ar gealiadurezh *völkisch*, gant hollad ul luskad lennegel, barzhoniel, speredel a anver en Alamagn *Kulturpessimismus*. Silvidigezh a glasker. Bez' ez eus un aon rak an tremened ha rak an dazont arouezet gant ar gevredigezh greantel. Silvidigezh politikel eo a vez kavet dre ar *Volk*. Lagarde, skrivagner tost ouzh al luskad *Kulturpessimismus*, a lavaras : « marteze n'eus ket bet eus hon Bro-Alamagn, ha marteze ne vo biken eus hon Alamagn ». Kement-se a laka war wel « Alamagn » ar *Volk*, hini ar *Kulturpessimismus*, an Alamagn *völkisch*, evel ur bed a hunvre n'eus biskoazh bet anezhañ ha na vo ket muioc'h anezhañ en dazont. En dazont, e ster ar galleg *futur*, rak e galleg e reer an diforc'h etre *futur* hag *avenir*, ar ger divezhañ-se oc'h enderc'hel mennoz ar souezhadenn, ar pezh a c'hell tarzhañ dirazomp hep ma c'hallfe bezañ bet jedet en a-raok e deselloù an da-zont, ar pezh a zo da-zont. E brezhoneg e vo diforc'h et « dazont soliadet » ha « dazont nidiadet », « dezvoned » (dazont galloudel, a c'hell mont da weredel) ha darzoned (digent oc'h eskoriñ). Ar *Volk*, dre un hunvre eus ar *Volk* o vezañ broad, gouenn, ha pobl, o vezañ dezverk gouennelour, dezverk a 'r gwad, pobl un dezverk kevredadel, komprenet evel ar c'horf kevredadel, o vezañ broad Alamagn, ur vroad o vezañ riez. Ha levezon ur gealiadurezh prederiet gant kudenn ar *Volk* a adkaver en uhelsperedoù Alamagn, eus Fichte da Wagner, adalek deroù an XXvet kantved betek ar C'hentañ Brezel Bed, er *Kulturpessimismus*, el luskadoù alaman *völkisch*, eginou ur gealiadurezh all, da zont, kealiadurezh a aweno kealiadurezh an Trede Reich.

Gwendal Piégais

Prederouriezh

Machiavelli : ar Priñs hag an istor

Dre an nebeud linennoù-mañ e taolimp ur sell war breder politikel Machiavelli ha war e breder war an istor. Ne sellimp na lennimp testennoù istorel Machiavelli, evel Istor Firenze¹ da skouer, pe e levr diwar-benn arz ar brezel², ma lak war-wel un nebeud munodoù istorel a-zivout istor Italia ha Roma³. Ne lennimp nemet Ar priñs, pe da nebeutañ an arroudoù ma tave da zarvoudoù istorel ha ma arver darvoudoù istorel evit skeudenniñ un oberenn bolitikel eus ur priñs bennak pe eus ur roue bennak.

Da gentañ penn, petra a c'hellomp lenn goude bezañ termenet un doare dafarad istorel er *Priñs*? Ar goulenn a c'hallfemp sevel zo hag ez eo Machiavelli istorour fall pe get? Perak ar goulenn-se? Mar kemeromp an istor hervez ur savboent kempred, evel ma vez kelenet hiziv en ensavadurioù deskadurel, an istor evel hentenn, e c'hellomp merzhout faziou istorel hag istorourel bras en oberenn Machiavelli.

Petra eo an istor hervez ur savboent kempred? Da gentañ penn, hervez Henri-Irénée Marrou, istorour eus an henamzer, « an istor eo gouiziegezh an tremened denel »⁴. Gant ar savboent-se, e teu an istor da vezañ ur gourzhergor a anaoudegezh, eleze saviad ar studier en istor. Ar studier zo an neb a soñj, a sol e breder war ur gourzhergor a anaoudegezh. Da skouer, evit ur studier a studi an Eil Brezel Bed, gourzhergor an anaoudegezh a vo an Eil Brezel Bed. Diwar savboent an hentenn-se, goulenn an istorour zo « Se zo c'hoarvezet. Perak? », « Perak eo c'hoarvezet ar pezh a c'hoarvezas? »

Pa lenner tamm ha tamm skridoù Machiavelli, faziou istorel a gaver en arben eus amresisted ha da hentennoù droch un tamm : n'eus ket a zielloù, dave ebet ; un doare « koun a 'r bed » eo amañ Machiavelli, ne ziazez ket e lavar war zielloù.

Gallout a reomp lavarout un dra : Machiavelli zo un davedelour a-zoare, pezh a c'hallfer envel « pec'hed pennañ » an istorour. Kemer un darvoud istorel hag e zisplegañ, e varn hervez pezh a c'hoarvezo da c'houde : se zo davedelouriezh. An davedelour zo an neb a varn an dispac'h gall en ur soñjal e marv Loeiz XVI. N'eo ket hepken un afer a varn avat : ur gudenn zo en hentenn e-keñver ar c'heñver savelek, kantvredañ, displegañ an dispac'h gall gant sklêrijenn un darvoud all evel marv Loeiz XVI zo evel krouiñ ur c'heñver a retvez etre an dispac'h gall ha marv Loeiz XVI. Ober davedelouriezh zo ur gudenn rak mont a ra a-enep un nebeud pennañnoù a 'n arbennelezh. Machiavelli a ra se bewech : un deiz,

1. *Istorie fiorentine*, Machiavelli, Niccolò, 1521-1525 (bloavezhioù skritur).

2. *Dell'arte della guerra*, Machiavelli, Niccolò, 1519-1520 (bloavezhioù skritur).

3. *Discorsi sopra la prima Deca di Tito Livio*, Machiavelli, Niccolò, 1518-1521 (bloavezhioù skritur).

4. « l'histoire c'est la connaissance du passé humain », Marrou, Henri-Irénée, *De la connaissance historique*, Paris, Le Seuil, 1954.

un tiern a gemeras ar galloud hag un tamm diwezhatoc'h ez eas d'ar strad en abeg d'an dra-mañ-tra. Ne baouez ket a ober davedelouriezh. Amañ e vezer dirak un diforc'h splann ha ramzel etre an arver a ra Machiavelli eus an Istor hag an arver a ra un istorour kempred eus an istor komprenet evel skiant. Dedennus eo hogen adalek ur savboent all : dav eo sellout ouzh peurrest preder Machiavelli. Petra a ginnig Machiavelli dimp er *Priñs*?

Er *Priñs* ez eus ur meizadur eus ar bed resis, ur bed a zo keneil pe tost kenan ouzh ar bed aristotelek. Gant Machiavelli e vever en ur bed aristotelek, eleze, evit bezañ resis, hervez Aristoteles, mab den eo al loen a vev el Lavar. Ul loen barrek gant ar poell eo, a c'hell prederiañ e endro, hogen un endro diboell ; pezh a dalvez e vev tro-dro dezhañ pezh a anv Aristoteles *fuñs*, pezh a zo bet troet a-hed an istor e *natur*, h.a. Se a adkaver en oberenn Machiavelli. Evit bezañ resisoc'h, e c'haller gwelout meizadoù arveret gant Aristoteles ha meizadoù keneil da reoù Machiavelli.

Eleze, ar *fuñs* en oberenn Machiavelli zo keneil gant ar *fortuna*, eleze ar chañs, holl ar pezh na c'haller ket bezañ mestr warni. Eleze, un deiz bennak ez aio mat an traoù, kantreizhet e vo galloud ar priñs gant galloud ar *fortuna*. Devezhioù 'vo, ne c'halli ket mirout diouzh diaesterioù kaset gant ar *fortuna*. Se a anv Machiavelli ar *virtu* (arverañ a rimp ar *gec anwal* evit chom tost ouzh ster ar *gec vertu* arveret gant Machiavelli), eleze barregezh ar priñs d'ober ar pezh a ranker ober pa vez ret ha na ober ar pezh na ranker ket ober, h.a. Eleze, e-kreiz ar *fortuna*, ne vo nemet ar varregezh-se a vo gouest, a gaver en *arête* henc'hresian, ha muioc'h c'hoazh er *fronéis* aristotelek, eleze ar varregezh d'ober a-walc'h hep ober re. Bezañ kalonek, da skouer, hervez Aristoteles, zo mont betek penn un dra hep mont re bell. Evit Aristoteles, ar *fronéis* zo diazezet war ur c'hempouez etre ar pezh a zo e re hag ar pezh a vank. Hevelep tra a gaver er *Priñs*, eleze un diouer a skiant gouest da lavarout resis pezh a c'hoarvezo, pezh a ranke ober, a ranker na ober. N'eus reolenn strizh ebet ha n'eus nemet an anwal, en hevelep mare barregezh d'ober traoù en un doare efedus war un dachenn bolitikel kenkoulz ha denel ha barregezh da c'houzout pezh a zo ret d'ober ha pezh n'eus ket ezhomm d'ober.

An istor, e-kreiz ar reizhiad-se, *quid* anezhi? An istor zo amañ, e bed Machiavelli, evel devarnadurezh a 'r bed. Dirak un diouer a lezenn e vezer — ne vez lezenn ebet o reoliñ ar bed hag an arc'hwelerezh anezhañ. Ne c'haller ket gouzout pezh a c'hoarvezo met dirak an diouer a lezenn ez eus un devarnadurezh a 'r bed hag a zo an istor. An amzer a ro tro d'ar priñs da gantreizhañ e c'halloud da vat, hogen ar ouiziegezh eus an amzer dremenet a gelenn, a ro kuzulioù, alioù, mennozioù d'ar priñs. Ar priñs zo suj, dindan beli lezenn bennañ ar *fortuna*, an kez lezenn o vezañ « n'eus ket a lezenn ». Ar priñs a rank teurel ur sell ouzh an istor a-benn bezañ sturiet ganti. An istor ne c'hell ket lavarout e c'hoarvezo an dra-mañ-tra mar c'hoarvez an dra-mañ-tra, hogen, dre ezteurel ur skouer tennet eus an tremened, e laka war zivall ar priñs, an tiern. Ar ouiziegezh istorel zo gouiziegezh al lec'hioù diaes da gantreizhañ evit ar priñs. Lavarout a ra « Diwall ! » Ur ouiziegezh mat a 'n istor a c'hallfe diskouez un hent : dre forzh lavarout na vont aze pe amañ, e c'haller desellout un hent, hag an hent-se, ar *fronéis*, zo hent an anwal.

Ar pezh a c'haller merzhout en arver an istor gant Machiavelli eo ez arver skouerioù resis rak mar fellje da Machiavelli ober un arver eus an istor penn da benn en dije skrivet ul levr istor, istor Italia, ur roll eus pezh a zo bet, eus pezh a zo ret na ober, h.a. Koulskoude, aze, en e levrioù, ne reas nemet kemer skouerioù n'int ket bet dibabet dre zegouezh. Gallout a reer merzhout skouerioù tennet eus Aleksandr Makedonia, eus istor dugelezh Medisis, h.a. Un dibab zo bet graet : e-touez penndudennoù istorel. Perak an dibab-se ? Peogwir gant Machiavelli e rank an istor bezañ un heuliad skouerioù da heuliañ. Ne vo ket kinniget enta skouerioù holl an dud aet d'an diskar, ne vo kinniget nemet patromoù, skouerioù da heuliañ. Ar c'horvo kentañ a c'haller tennañ zo hemañ : distabiled ar bed politikel zo peurbadel. Ha dreist holl, distabiled arver ha plas ar galloud. Ar c'heñver kemplezh etre *virtu* ha *fortuna* zo lakaet en a-raok gant an istor. Skoazellañ a ra ar priñs en ur ziskouez ar pezh a zo gallus met ket ar pezh a zo asur ha resis.

A greiz holl, an istor a batromoù nad eo ket un istor er ster kempred zo arveret ha neket soñjet. An istor aze n'eo ket ur skiant, met un oberenn bemdeziek. An istor zo amañ evit bezañ heuliet. Ar skouerioù brav zo amañ evit bezañ heuliet, evit ma kemerer kentel anezho. An istor a batromoù-se a adkavot gant ur prederour alaman, Nietzsche. En e levr *A spleit hag a noaz an istor evit ar vuhez*⁵, e tifer'h un nebeud rummadoù a istor : da gentañ, ar skiant, an istor a varn, da eil un « Henistor » a glask mirout hag azeuliñ un amzer distremenet, da drede, ar *Monumental Geschichte*, un istor a batromoù. An istor-se zo un istor a c'halv mab den da vont war-du e zreistelezh, istor Perikles, Aleksandr Makedonia, un istor nad eo ket graet evit bezañ studiet, hogen evit bezañ bevet. An istor-se a c'halv mab den d'un dreistelezh. Gant Machiavelli e verzher ur meskaj etre ur meizadur aristotelek a 'r bed hag eus un tu all un desellout eus ar pezh a vo anvet gant Nietzsche an « istor patromel », un istor a skouerioù, a hentoù da heuliañ.

O c'houzout ne oa ket gwall garet Aristoteles gant Nietzsche, ur c'heneilded a vezadour ken enebet e spered Machiavelli zo iskis. Ar goulenn a c'halfemp sevel : perak ne gaver ket ur meizad a batrom e preder Aristoteles ? Perak e vo ret gortoz Machiavelli evit kavout un azon kentañ a 'n istor a batrom, despizet hag arveret diwezhatoc'h gant Nietzsche ? Aristoteles en deus savet e breder e lodennoù heverk liammet mui pe vui kenetrezo. Da skouer, evit hon studi, e lennimp ar preder politikel hag ar preder divezel. Er politikerezh ez eus uhelvennad ar *polis* peurvat, hag en divezelezh e vez savet mennoz ar c'heodedour peurvat. Hogen n'eo ket ur c'heodedour, un den eo. Neuze petra a vez graet gant mennoz pe meizad an den dreist ? Pezh a zo souezhus ; perak na lakaat an den-se er politikel evit sevel ur *polis* peurvat ? Eeun a-walc'h eo ar respont : diazezet eo ar geoded war un emgempenn eus an ensavadurioù anezhi gant ar geodedourion. Lakaat ur c'heodedour da heuliañ hent an dreistden, ar c'heodedour-se a lakfe stern ar *polis* da darzhañ en abeg ma ve re beurvat evit ar *polis* en-un. Perak ? Hervez Aristoteles, e rank ar c'heodedour bezañ *arkein kai*

5. *Vom Nutzen und Nachteil der Historie für das Leben*, Nietzsche, Friedrich, Verlag Von E.W. Fritsch, Leipzig, 1874.

arkestai, eleze gouest da vezañ e penn ha renet diwezhatoc'h, gouest da vezañ rener ha renet war un dro. Hogen petra ober eus un den ken dreist ma ne gaver den da vezañ dreistoc'h egetañ ? Setu kudenn vras Aristoteles : doare ebet da lakaat da glokaat politikel ha divezel en un doare peurvat rak arabat d'ar c'heodedour bezañ dreistoc'h eget ar *polis* en he un. Ha neuze, un nebeud kantvedoù goude, e c'hell Machiavelli adarverañ an istor a batrom rak skrivañ a ra evit ur priñs ha ne ra van eus ar stern politikel, eus ar geoded. Evit bezañ an tiern e rank dres mont dreist d'ar bevennoù. Diwezhatoc'h c'hoazh, Nietzsche ne ray forzh eus ar *polis* kennebeut rak Nietzsche zo anezhañ ur prederour e-maez ar geoded, e-maez ar bed politikel. Hag e-kichen, ez eus Aristoteles o kaout ur gudenn gant an disrannse, an disrann etre un den mat o lakaat en arvar ar geoded vat, disrann etre mad an den ha mad ar geoded. An arver a ra Machiavelli eus an istor zo pell diouzh an arver boas a reomp anezhi en hon amzer gempred. Un istor all zo tremenet evit tresañ dremmoù disheñvel d'an istorioù-se. Met deskiñ a rimp kalz dre studioù keñveriet a-zivout ar « skiantoù »-se. An disrann ne ra ket an enebiezh. Hag istorioù kollet n'int ket da lakaat a-gostez.

Gwendal Piégais

Gerva

Amañ dindan e kinnigomp despizañ en un doare berr un nebeud gerioù kavet diaes gant reoù 'zo eus hon lennerion. Gant ar spi e vo aeset al lennadenn dezho, hon eus lakaet despizadurioù berr, evel reizh, ha marteze amresis un tamm.

Dafarad : dastumad skridoù.

Darsav : emsavadeg, ar pal anezhi o vezañ diskar an urzh savelet.

Despizadur : displegadenn eus ur ger, en ur geriadur da skouer.

Digent : hep netra araozañ/araozi.

Dinodiñ : diwanañ.

Divezelezh : skiant ar pezh a zo divezel.

Eskoriñ : diwanidigezh (eus ur vro da skouer).

Gweredel : galloudel, a zo gallus.

Kalvezel : a denn ouzh un dachenn arbennik eus an obererezh pe eus ar ouiziegezh.

Kantreizhañ : reiñ da reizh.

Kefredelezh : skiant a denn d'ur ouiziegezh.

Kemez : skiant he deus da c'hourzhergor despizadur ar wirionez.

Kemplegañ : bastañ.

Da zont er-maez e Ebrel 2010

SADED GRAMADEG AR VERB

Strollad an Deskadurezh Eil Derezh (SADED, 1963 — 1972) oa e vennad lakaat en e sav ur c'helennerzh a live gant ar c'hlasoù dibenni studi hag ar bloavezhioù kentañ skol veur. E 1963 ez embanne e gentelioù kentañ. Roet e veze ar re-mañ dre lizher e-doug ar bloavezh ha da genver devezhioù studi e-kerz an hañv.

Ur perzh heverk gant kentelioù Yezhadur SADED eo e lakaont a-wel un hil a skrivagnerion eus an 19^t hag eus deroù an 20^t kantved (MORVAN, ROUDAUT, AR C'HOAD, INISAN, UGUEN, h.a.) a lakaas ar brezhoneg da emdreiñ etrezek un eztaolusted hag ur galloud dezevout n'en doa biskoazh anavezet.

An embannadur a ginnigomp a adkemer kraf ha kraf kentelioù 1966 en o fezh. Abaoe grez SADED neoazh ez eus bet renet imboure'hioù all war ar yezh ha diorreet un dermeneg yezhoniel un tamm mat resisoc'h. Neveset eo bet an displegadurioù ha liesaet an egrafoù.

E dibenn pep kentel hon eus dalc'het testenn ar poelladennoù o doa d'ober ar skolidi ha, diouzh an dro, ar poelladennoù skouer.

Notet e vo an daskemmadenn graet e talbenn al levr : ouzh *Yezhadur* — deskrivadur ar yezh evel m'emañ boaziet gant he arveriadeg — eo bet erlec'hiet *Gramadeg*, eleze studi ur yezh evel furm dibarek eus al lavar.

un dornlevr, 256 p., 22 €, kuit a vizoù kas ISBN : 978-2-901383-72-7

evit urzhiadiñ :

PREDER 19 Park Maen Meur 29700 PLOVEILH
mal-e : preder.coic@wanadoo.fr
hag el levrдиоù

NIDIAD

Kelaouenn lennegel trimiziek.


Kadoriad : Gwendal Piégais
Sekretour : Malo Adeux
Teñzorier : Hoel Mahe

NIDIAD BREIZH
33 straed Lorraine
44000 NAONED

*Kasit ho chekennoù (e gourc'hemenn **NIDIAD**) da :*

NIDIAD
57 straed La Grande Haie
44119 GREGAMP AR FEUNTEUNIOU
(GRANDCHAMP-DES-FONTAINES)

Priz reel : 4€
Koumanant bloaz, Breizh : 13€
Koumanant bloaz, estrenvro : 14€
Studierion, dic'hweleion : 12€
Levraouegoù ha strollezhoù : 17€



Darempred :

nidiad.gwe@gmail.com